

ANGELUS AN NOZ

Hen: Sell, eus e dron, an heol a gouez Me a wel
e'hoaz, a-dreuz ar gwez, E la-gad ruz o lu-ger-
ni, an noz a dost-tiz warni. Hi: Er c'hoad ar
bleun hag an deliou, Bep an tamm
mig, a goll o liou Ha dre ma tua ar menez
Ec'h enaou tour-tan an enez

Hen. — Sell eus e dron an heol a gouez ;
Me a wel e'hoaz, a-dreuz ar gwez,
E lagad ruz o lugerni,
An noz a dosta, tiz warni.

Hi. — Er c'hoad, ar bleun hag an deliou,
Bep an tammig, a goll o liou,
Ha dre ma tua ar menez
Ec'h enaou tour-tan an enez.

Hen. — Ar mor a baouez da c'hourdrouz,
Al labous ne ra mui a drouz,
An avel hepken, heb ehan,
Goustadik a zistag he c'han.

Hi. — Ennan kant ha kant goulaouen,
Nag an oabl doun a zo laouen,
E lizerennou aour warno
Doue 'n deus skrivet e ano.

- Hen.* — Pa zeu ar bed holl da devel,
Na kaer eo klevout o sevel
Mouez ar c'hloc'h, ker c'houek e vennoz .
Pa zon e Angelus d'an noz.
- Hi.* — D'hol labour tenn roomp arzao,
Hah en dachenn hon-daou war zao
Meulomp Mari a vouez uhel,
Evel m'he meulas an Arc'hel.
- Hen.* — Hon-daou, te ganen, me ganez,
Stouomp dirak hor Rouanez,
Gant he Doue krouet dinamm,
Gantan dibabet evit Mamm.
- O daou.* — « Salud, o Mari, leun a c'hras,
Dreist an holl, Doue ho karas ;
Salud, o Mari, leun a beoc'h,
An Aotrou Doue 'zo ganeoc'h.
Dreist ar gwrazez oc'h benniget,
Rak Mab Doue hoc'h eus douget,
Ha Jezuz, o kaerat ano,
Morse da ren ne ehano.
O Santez Mari, Mamm Doue,
Mamm ho Krouer hag ho Roue,
C'houi an hini a zaludomp,
Pedit-Hen bepred evidomp.
Pedit, Mamm druezus meurbed,
Evit holl bec'herien ar bed,
Breman, e-kreiz ar stourm garo,
Ha dreist-holl da eur ar maro. »
- Hen.* — Ha pedet ganeomp hor mamm ger,
Dienkrez baleomp d'ar ger,
Ouz Mari neb en em erbed.
A c'hell bale heb aoun ebed.
- Hi.* — Gant he Mab Jezuz ha ganti
E vezo diouallet an ti ;
En o c'haloun, en o envor,
E tougont bugale Arvor.